

## KUZUL STUDIERIEN AR GEVRENN GELTIEK

Ar C'huzul a zo bodet ennañ studierien enskrivet e Skol-veur Breizh-Uhel hag e Kevrenn Geltiek ar Skol-veur-se.

Da bal en deus ar C'huzul-se difenn interestoù studierien ar Gevrenn Geltiek war verr pe war hir dermen, ha gounit evito ar gwir d'ober gant ar brezhoneg en o buhez pemdeziek hag en o zarempredoù gant ar servijoù melestradurel er Skol-veur pe e lec'h all, ha teurel evezh ma vo doujet d'ar gwir-se.

Warlene en deus gounezet Kuzul ar Studierien krouidigezh an Aotreegezh war ar brezhoneg, an diplom ofisiel kentañ oc'h anavezout ar brezhoneg hag e blas a live gant ar yezhoù all. Ouzhpenn 330 studier a zo enskrivet ar bloaz-mañ en Aotreegezh-se, ar pezh a ziskouez, ma vefe ret, e oa reizh hon goulenn. Aet eo ar Gevrenn Geltiek da vrasañ kevrenn ar Skol-veur e 1981-1982 evit niver an dud enskrivet e bloavezh an Aotreegezh.

### PETRA A C'HOULENNOMP HIZIV ?

- e vefe tu deomp da studiañ evit an aotreegezh: pellgelennadurezh evit an holl gentelioù, postoù kelennerien ouzhpenn er Gevrenn;
- e vefe roet labour d'ar studierien tapet ganto an aotreegezh: postoù kelennerien war ar brezhoneg er skolioù gant ur c'hCAPES war ar brezhoneg, postoù jubennourien er velestradurezh;
- e vefe divyezhek ar Skol-veur: pannelloù ofisiel divyezhek, pape-rachoù enskrivañ divyezhek;
- e vefe kelennet hor yezh er skolioù-meur all: medisinerezh, gwir, ekonomiezh, skiantoù an natur, IUT hag all a live gant ar yezhoù all;
- e vefe digoret d'ar brezhoneg an holl arnodennoù: CAP, BEP, BTA, BT, BTS, koulz hag er c'honkourioù melestradurel.

### A-BOUEZ eo evidomp:

- \* e vefe roet labour d'an dud barrek war ar brezhoneg, un dra RET eo
- \* e vefe kelennet hor yezh en un doare dereat, MALL 'zo.

NE ASANTIMP KET da ziskoulmoù na zalc'hont ket kont eus hor goulennoù, na zalc'hont ket kont ac'hanomp zoken;

da lavaret eo NE FELL KET DEOMP postoù "banalizet", postoù daouzanvez pe "daoubenn", rak n'int ket postoù kelennerien war ar brezhoneg ha ne roint ket labour d'ar studierien tapet ganto o aotreegezh.

N'EUS NEMET UN DISKOULM, UR C'H-C.A.P.E.S. BREZHONEG !

## COMITE DES ETUDIANTS DE LA SECTION DE CELTIQUE

Le Comité est composé d'étudiants inscrits à l'Université de Haute-Bretagne et à la Section de Celtique de cette Université.

Son but est de défendre les intérêts, immédiats ou à long terme, des étudiants de la Section de Celtique, et d'obtenir la reconnaissance du droit à l'expression en langue bretonne pour ces étudiants dans leur vie quotidienne et leurs rapports avec l'administration, universitaire ou autre, ainsi que de veiller à l'application effective de ce droit.

Le Comité a obtenu l'an dernier la création de la licence de breton, premier diplôme officiel reconnaissant l'existence de la langue bretonne et sa parité avec les autres langues. 330 étudiants se sont inscrits cette année à cette licence, ce qui prouve, si besoin était, le bien fondé de cette revendication. En 1981-82 c'est la Section de Celtique qui compte le plus grand nombre d'étudiants inscrits en année de licence.

### NOS REVENDICATIONS ACTUELLES:

- l'organisation de l'enseignement de la licence: télé-enseignement complet, postes d'enseignants supplémentaires en Celtique.
- la création de débouchés pour les titulaires de la licence: postes d'enseignants de breton recrutés par CAPES de breton, postes d'interprètes dans l'administration locale et régionale.
- institution du bilinguisme à l'Université: dossiers d'inscription, affichage officiel.
- création de l'enseignement du breton dans les autres facultés de médecine, droit, sciences éco, sciences, IUT, à égalité avec les autres langues.
- introduction du breton aux épreuves de CAP, BÉP, BTA, BT, BTS, ainsi qu'aux concours administratifs.

### LES PRIORITES sont pour nous:

\* la création d'emplois pour les bretonnants qualifiés, c'est une NECESSITE;

\* un enseignement décent de la langue bretonne, c'est une URGENCE.

NOUS EXCLUONS toute solution qui ne tienne pas compte de nos revendications, de notre représentativité, de notre existence même;

NOUS NE VOULONS DONC PAS de postes banalisés, de postes bivalents, ce ne sont pas des postes d'enseignants de breton.

**UNE SEULE SOLUTION, UN C.A.P.E.S. DE BRETON !**

Comité des Etudiants de Celtique  
Université de Haute-Bretagne